

DISPUT NEVEZ

SAVET' ETRE DAOU ZEN IAOUANK
DIVOAR BENN EUN DIMEZI

Oar eun ton anaveet

Me a oa manet minor boe an oad a bemp bla,
Ha breman me zo major, en oad da douch ma zra ;
Mar choman pel den iaouank a renkin bean tost,
Pe achapo ma arc'hant pa na deus ket a lost.
Gwel eo din buan difen keit a meus eun tam treo
Ha klask danfe eur fortun vo engal din a gleo
Me hanve eur plac'h iaouank a gafan deus ma zouch ;
Beza deuz eun tam arc'hant ha oar a renk da douch.
Mar klaskan eur vas-vælen, me vo brudet dre oll ;
Pean Mari d'an imban, kemen-se gafan droll ;
Mont ma unan e bete, ma na blijant quet deñ,
D'am refus deus liberte deus ket an droat da skeñ.

Ar Potr oc'h erruout e ti ar Plac'h iaouank.

Salud, feumeulen iaouank, dre gomzo Cupidon,
Me meus poan ha nec'hamant ken eo trist ma c'halon,
Me a zo deut d'ho koulén, ma akseptet ma c'hoz
Nimp a lakao peden breman gant hon zud koz.

Ar Plac'h

Me na gredan ket den iaouank o pe eur galon trist,
C'hui peus formet eun diskour vit kaet eur banac'h jist ;
Toulet zo eur variken vad, me gred ho poa klevet.
Oar digare ober marc'had e torfet o sec het.

Ar Potr

Me n'eo ket vit kaet boesson hon deut betek aman,
Respontet din ho rezon oar pe z a c'houlán ;
Beza meus okasion da feurmi eur c'houldri,
Ne vank din met eur pichon 'vit komans ménagi.

Ar Plac'h

Oblijet hon da gredin rezouniou an dud koz :
E krog o c'hoant dimezi prim vel eur bar drouk kol ;
C'houi zo deut surpris a-mis d'am goulem, den iaouank,
Evel kals ofrans o vouis da chapel Zant-Visant

Ar Potr

Aboe ma komansas Venu da bika ma c'halon,
Pemb bla zo tremenet aboe est a melc'hon,
Ho c'havizan ar merc'hed n'am beus kavet unan
A defe ma zorc'hennet evel d'oc'h, Mari-Jan,

Ar Plac'h

Klevet eta, Imari, na golet ket oc'h amzer,
Me c'ha d'ho tizorhenni pe eo dies ober .

Me am boa ma c'hurunen da vonet d'ar bed-all,
Gredan ket e timefen na dec'h na da re all.
Dimezi 'n'amzer brezant zo mont en esklavac'h,
Guir eo kalz antre contant en breuriez karnac'h ;
Pa ve 'n dud oar marc'h fortun vent kamarado bras
Hac eur yeach groet ar c'hontrat vent oll vel ki a kas.

Ar Potr

Daou den a ve kontradet gle beza vel nnan,
N'eum respecti, n'eum garout, vel Tisbe a Piram ;
Mar gom choaset gant Doue vel Tobie ha Sara,
A veofomp enn union hac accord oar bep tra.

Ar Plac'h

Vit domisat eun ouenner be o froter dezi o zall,
Koms brao : chom 'ta, koantennik, tap da droad en uall ;
Eur vec'h prennet ann ugent, et ann ask oar e fen,
Oar evn e renko kerzet pe gavet fest dar gueven,

Ar Potr

Ann tol o zo difennet gant Doue a gant ar bed,
N'oullan ket kavet eun hano vel Albert-Pil-he-Vroeq,
Pehini nevca goulennet, rog sina e gontrat,
Mar bije mechant e vrog, kaet droet d'he filat.

Ar Plac'h

Kals a guemer ann droat-se hep goul permission ;
Non quet da betra tamal ken bras disunion.
Na glever met an insult, a gourdrous hag an tol :
Skouer fêl 'vit ar vugale ha skandalus d'an oll.

Ar Potr

Ar bel zo corrompet breman gant ar visso
Hag ha doi bad jalousi en kals ar jardino.
An ourgouil zo ken kreñv ra dimp n'eun meprisan,
Oll so hoant da gommandi ha den na c'houl plegan.

Ar Plac'h

Evidon-me, ma dimezan, renki beza mestres,
Mar ho peus c'hoant kommandi nomp ket mad assambles
Hag ouспен tivisfen, rog beza kontradet,
E ve red din kavet eur voetur, n'an ket oar ar bidet.

Ar Potr

Ia, ar merc'het zo breman, gar beza gouisquet mad
Ha kotillon, ha brago, oll o deuz c'hoant da gad :
Ann toul, ar boutonno, ha commandi partout,
Ha pa de debret ar mel, lan a lipo ar pout.

Ar Plac'h

Enebon, beza zo groague renk guisqua ar brago,
Ma fiont re n'ho fotred dirigean 'r menajo,
Deuse abred ar ziel de goac'h toul ann alhue,
Ha mont da chom da Langueux, da frita paourante.

Ar Potr

Dre ze renkin kaet eur plac'h deus a goste a mor,
A reze oar oll a sekret da destumer en gor ;
Prenan guiskamant frezuz, condui eun dol rond,
Ha tamal c'hoas da Isidor mar ga ar stal da fond.

Ar Plac'h

Ha c'hui, entre-zoc'h potred, oar cleuza boutaillo,
Kargan mad, ha chareal d'an ostallerio :
Goude dispign oc'h arc'hant, rentet dal a bouzar,
Bete oar ann henn bras a diskaret ho kar.

Ar Potr

N'en deus ket a intrudu, vel groague Breiz-Izel,
A reze o deus oll peb a filtr ha peb a sac'h flanel ;
Goud a ouzont grilla kafe, implian koaven lez,
Fonta suk en douar tom hag ober ze hep frez.

Ar Plac'h

C'hui a zo eur mestr koseer, c'hui rai c'hoas eun oac'h
Evurus vo 'r feumeulen a c'halon oc'h attrap ;
Vanko ket dezi a neudri pa vefet oar dro ar guer,
Ha diboutret he dillad d'ar c'houlz ha d'ann amzer.

Ar Potr

Mar me eur plac'h a fesson, vel meus esperans,
Ma ve quet faibl e bis da soufr he c'hallians,
Beza d'ho he liberte, na vo qet esclaves ;
Mes vit eur veal gafe na bermetin james.

Ar Plac'h

Neuze vo red dec'h ive renons d'ar guin-ardant,
Ma c'helfet miret o pen hac ho c'hintentamant ;
Ma be red dec'h kommandi hac ebars bag er mez,
Nim groet vo dre ho losten a vo zila 'r lez.

Ar Potr

Partout roi ma avis ha mont d'ar marc'hajo,
Balamour da douch an arc'hant ha d'efan banac'ho
Ha pa retorni d'ar guer, mar be ar vroek fasset fal,
A kommansi da gana vit ober dei dansal.

Ar Plac'h

Mar gue vit ober boufon ho peuz ezomp eur plac'h,
Eo guel d'ac'h klask eur vates, a pa vo squiz ganac'h
A vo libr da bartian ha c'houi da glasq eun all :
Ha ma partife ho kroeg e pe eun tam scandal.

Ar Potr

O eur vroeg eo a mezo ben gouel Mikel quantan
Dec'h a ran a breferans, c'hui a mo mar gallan :
Na deut quet da gredin, evit-hon da farsal,
A me c'hoant d'ho poufonni, rak n'hon quet eun den fall.

Ar Plac'h

Laret meus dec'h ma ide, na neum dislaran quet ;
Gredan quet e timeten dec'h na da zen a bet ;
Konversin ran gand an dud da roulan iaouankis,
Divezat vin da c'houezan pa mo poaset ma bis.

Ar Potr

Deus klevet ho proposiou, noc'h ket vit an dimezin.

Ar Plac'h

Nan, a drazur, den iaouank, birviquen ze na rin.

Ar Potr

Me sonje feurmi eur plas oar eun anou hon daou.

Ar Plac'h

Feurmet-han dec'h oc'h unan a peb hini n'he graou.

Ar Potr

Neuze c'han da sortial, ken a vo plac'h iaouank,
Bed secret oar guemen-ma hac em renfet kontant,
Pa na non ket d'ho c'hide, red eo klask eun all.

Ar Plac'h

Breman oc'h libr da vale keit a m'oc'h dishual.

Ar Potr a zorti ous n'em lavaret

Non ket oar besort koste ruilla ma boul,
Me grede d'in oa merc'het en c'hoant dime a foul,
Trompet eo bet ma gueno o santout a sort blas
Lec'h ma sonjen ober mil, nebont meus groet kas.

Pevar mis oant bet en Paris, sernet gant an Prussianed,
Na biscoas ar sort trubuil ma bet oar ma speret ;
Bet aboa kals a viser hag eur bansion dreut,
Goas eo din klevet breman man ma fri oar ar gleut,

Oar ben eiz devez goude, kanaourien ma bro,
A gri oll, a vouez huel ; potr egrouin, voar n'hon,
Obliget hon d'andurin, pezh hon tapet en plan
Ma zentfen ous ma humor, me rafe dei biskan.

Mes pa deus brudet a dost, me a vrudo a bel ;
Me ha da gas eur chanson da vale Breiz-Izel ;
Ha tud yaouank ann Arvor, kouls vel koste ar c'hoad,
A guemero plijadur da c'hoarzin ous ma stad

PIERRE RAISON

(Propriété).